

## Luduen / Cendrillon.

(f. 191)

Sellaouit kana me ho ped  
 Eur chanson neve kompozet  
 Deur c'hregig iaouank e zeo gret  
 El Luduen e zeo anvet.

Sao a lesse koz luduen  
 Da ficher dime eur banac'h soupenn  
 Tremenet ar eis de baoue dec'h  
 ne meus bed tam nemed bara sec'h.

Al luduen evel ma klevas  
 er fornigellik a lammas,  
 Ar (1) en da kerc'hat eun ordren drein  
 En avis stouva var he c'hein.

Pa voa ed da stouva var nezi  
 Deuz en eul lamp var leuz an ti  
 eur vech all me a kerzo  
 Pa velin ar vas e vond dan dro.

Eun torchad lin en deus prenet  
 Pemzek koennek e bed koustet,  
 Tri mis e bed och ho faluchat  
 A tri mis all oc'h ho c'hribat.

(f. 192)

Tri mis eo bed oc'h o neuza  
 A tri mis all oc'h o goerza (2)  
 Kement se tout e ra er bloa.

Jannet Puill, 14 Janv: 1851.

(1).- Ms.: ar; lire: ac.

(2).- Faut-il lire goerza (vendre)? - Le 2<sup>e</sup> vers doit sans doute être répété pour former une str. de 4 vers.